




PEDEN DA ZANT KORINTIN

DISKAN.

Sant Korintin, patron Kerne
 Diouallit mad hor bro ;
 Grit ma virimp lezen Doue
 Beteg heur ar maro.



1. C'hui zo breman gand ann Elez,
 Skeduz ho kurunen ;
 Ni zo er brezel didruez,
 Er boan hag enn anken.
2. Euz ann Ifern eo deuet Satan
 Evit mougá hor Feiz ;
 Teureul a ra moped ha tân
 E peb korn euz á Vreiz.
3. Ann dud n'ho doa ket kaloun gre
 A zo dija d'ann traon ;
 Mil ha mil all gouezo ive
 Ha kreski rai hor c'haon.
4. Ar groaz, ann Iliz, ann Aoter
 A gren bete koueza ;
 Ma bad re-bell ar barr-amzer
 Setu kollet pep tra.
5. E Kerne, menez ha traonien
 Zo d'ehoc'h a berz Doue ;
 Glepet int bet gant ho c'huezen,
 Dalc'hit stard d'ho leve.

Da veza kanet e chapel Sant-Korintin.

6. El leac'h-ma guech-all, d'hon tadou
C'hui oc'h euz prezeget ;
Da Zoue, dre nerz ho komsoù,
Ez int bet gounezet.
7. Ma ne glevomp-ni ken ho mouez,
Ama ho relegou (*)
A zigaso d'heomp aliez
Sonj euz ho kenteliou.
8. Enn hon touez hoc'h eskern santel
A vezo enoret
Ha c'hui a roi bepret skoazel
D'ho pugale garet.
9. Doue da dad, c'hui da batron,
Baradoz d'ho ene,
Mari da vam ha da itron,
Setu c'hoant tud Kerne.

(*) Ann 23 a viz Gouere 1893, darn euz relegou Sant Korintin zo bet digaset gant ann Aotrou Valleau, eskob Kemper, d'al leac'h m'eo bet ar Zant o chom e parrez Plomodiern.

Ann 22 a viz Gouere, chapel nevez Sant-Korintin, zo bet bentget gant ann Aotrou Dubillard, Eskob Kemper.

*Pardoun bras bep bloas d'ann eil sul a viz Gouere.
Pardoun bihan d'ar zul varlec'h Goel Sant Kortintin,
miz Kerzu.*

~~~~~  
**Imprimatur :**

Corisopiti, 12 Julii 1893.

Eug. BERNARD, *Vic. gen.*

---

Kemper, moullat e ti de Kerangal.